

---

## GWERZ KONTEZ TONKEDEK

Ewit esad dousad ar rimo brezonek

Kazi war dôn *Maner ar Fawet*

---

Mar get c'houi d'ar brezel,  
Mar get d'ar Palestin,  
Lest ganimp n'ho kastel  
O pried Idolin,  
Gand ma diou dimezel  
E vrodo ar zatin.

A boan ai partied  
Ar c'hont e mez e di,  
Allaz wit e bried !  
Koe marc'h ar jalouzi :  
Da vessan ann deved  
E kesont anezi.

Mesk bokejo burlu  
E lann hi gompoze  
Gwerjou leun a vertu  
Wit kana da Doue,  
Ma returnje dustu  
E idol Milibe.

Tont deuz ar Palestin,  
Eun de teu da dremen,  
Eur serten pelerin  
Gwernisset a gregenn  
Kemer moez Idolin  
Wit eur vandolinen

C'houi a gan re joaüs  
Da berc'hen o c'hastel,  
O ! kanet trueus,  
Maro he boe zo pel,

— 7 —

Mès maro gloriuz,  
Ac enn kristen fidel.

Eun devez, pell goude,  
Tarnije ar c'houlmed,  
A tossen Menebre,  
Wa dija malhenet ;  
Hi gane da Doue  
Ken kontant e devet.

Vel eun drompill bruillânt,  
'Chouri eur c'hoursier ;  
Vel eun astr eklatant  
E vrill eur bouklier  
'Chang enn mizilour koant  
Kristal pur ar rivier.

Aret pac'hik joaüz,  
Mès aretomp aman,  
Eur voez melodiuz  
Barz e lan a glewan ;  
O ! Redemptor Jezuz,  
Perfidi a zantan.

Kerkent ar c'havalier,  
Bleg e vizieren,  
A lamp dreist ar skalier  
Evel eul luc'heden,  
Ac enn umbl chevalier,  
'Zalud ar verjeren.

Zalud d'ec'h, berjeren,  
A d'ho moez truezuz ;  
Mil iskuz n'eur dremen,  
Mar c'hon ken kiriuz :  
Wit piou ai o pedea  
Trist a melodiuz.

Aotro, c'houi 'goel velen,  
Toled mesk ar guerrec,  
Heb brec'h wit ma difen,  
O vessa neur lannek :  
Me ar chatilinen  
A gastel Tonkedek.

— 8 —

Mar goc'h chatilinen,  
Kleed kad eur pried  
Puissant d'ho tifen ;  
Enn gras n'eum espliket,  
Piou o tiles vellen ?  
Eun de vo miliget.

Na vo ket miliget,  
Moderet o kouzou,  
Wit ar Groaz viniget  
Kemeraz ann armou,  
Mesk ar Zarasined  
E treñ he relegou.

Ma fried Idolin,  
Ma idol dous a pur,  
O ! deuz war ma feutrin,  
Re leun eo ar muzur,  
Kent wit arc'hoaz vintin,  
Me walc'ho an injur.

Kerkent he a dennas  
Gard e dorn puissant,  
E lamnen fin damas,  
Deuz e foureo brilliant,  
Malheur 'ta veag c'hoaz,  
Red vo bea tirant.

O ! klenket o kleve,  
Kont, arretet ho lans,  
Lezomp en dorn Doue  
Ar c'hivac, ar potans,  
Malheur d'he vugale  
Gred touc'h euz e valans.

